



Devezh-studi « Treuzkas »

Galv da bredegennoù

Deiziad an devezh : Sadorn 4 a viz Ebrel 2015
Lec'h : lise labour-douar Kerplouz LaSalle – an Alre
Euriou : 9 e – 5 e

Aozadur :

Ar c'hevredigezhioù Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna
Get izili a skolioù-meur Breizh ar C'hornôg, Roazhon 2, Kreisteiz Breizh

Kinnig :

Treuzkas eo pal ar c'hollokoù hag an devezhioù-studi dre-vras, e-mesk palioù arall c'hoazh : eskemm soñjoù, kas pelloc'h un enklask àr ar stern get sikour selloù ha mennozhioù nevez, kejiñ get enklaskerion arall...

Treuzkas eo pal an devezhioù-studi aozet a-c'houde 2012 get Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna : roiñ d'anaout labourioù kaset e brezhoneg hag àr ar brezhoneg, roiñ d'an enklaskerion ha d'an dastumerion an tu d'er gober e brezhoneg iwe.

Divizet eo bet enta lakaat **an treuzkas** da vout tem an devezh-studi da zonet kar ledan a-walc'h eo evit degemer a bep sort predegennoù ha danvezioù. E-dan an tem-se e vo studiet neuze get ar c'homite skiantel kinnigoù é tenniñ, lakaomp, doc'h :

- treuzkas ar sevenadur dre vras (pezh kani ? penaos ? get piv ? e-men ?...);
- treuzkas an dañs (ha chañchet eo ar mod da dreuzkas an dañsoù hengounel, èl ma lâr Yvon Guilcher ? ha penaos eo evit sortoù dañs arall, a-vaez vro marse ?...);
- treuzkas ar sonerezh (tonioù, pozioù, sonennoù, kanaouennoù...);
- treuzkas ar segredoù kegin, ar mod da fardiñ ar boued dre vras;
- treuzkas ar chemet àr ar sevel tier er vro;
- treuzkas barregezhioù a bep sort c'hoazh : gober àr-dro ar jardrin, sevel glouestraj...;
- treuzkas ar yezh, kalavern pe yezh e vehe hag e pep tachenn : buhez foran, skolioù, skolioù-noz, er familhoù, en dudioù, evit ar vugale, ar grennarded pe an dud daet...;
- treuzkas disoc'hoù enklaskoù skiantel :
 - pe e pledo ar predegennoù get fesonioù d'ober, da wellaat, da vroudiñ an treuzkas-se,
 - peotramant e tiskouezint ur feson fetis d'ober get disoc'hoù enklaskoù ar predegennoù.

Dedennet e vo èl-se ur publik ledan, c'hoant getoñ klevet kaoz ag a bep sort traoù e brezhoneg. Prizet e vo neuze get ar c'homite skiantel ar mod da zegas gouiziegezh d'ar brasañ niver.

Yezhoù :

Yezh pennañ an devezh studi e vo ar brezhoneg. Degemeret e vo neuze da gentañ ar c'hinnigoù kaset e brezhoneg ha graet e brezhoneg.

Jubennet e vo razh ar predegennoù e galleg (ha d'ar galleg hepken). Goulennet e vo neuze get razh ar re degemeret :

- derc'hel d'o c'hinnig ;
- komz ent naturel ha diwall a gomz re fonnapl ;
- komz kentoc'h evit lenn : klask enta en em harpañ àr notennoù kentoc'h evit lenn un destenn beurskrivet ;
- kas en a-raok d'ar jubennerion, dre dTi Douar Alre (oliertidouaralre@gmail.com), kement tra skrivet a c'hello sikour get ar jubennerion : testenn, kinnig luc'hvanoù (PowerPoint), listennad skouerioù ha c'hoazh emeur en soñj kinnig d'ar selaouerion, pe notennoù, ur listennad anvoù (tud pe aozadurioù)... ;
- ma faot dezhe lenn un destenn e vo pouezusoc'h c'hoazh d'ar jubennerion labourat àrni a-raok an devezh-studi ; goulennet e vo neuze gete lenn difonn, chom a-sav dre bep div wezh ;
- mar bez roet sifroù, o distag splann hag o adlâret mar bez afer ;
- mar bez roet skouerioù gerioù pe troiennoù dibaot a-walc'h lakaet en ur geriadur bennak, roiñ ur listennad anezhe get an droidigezh bet dibabet e galleg ;
- pa vo kemeret ar gaoz (e brezhoneg) goude unan hag en neus komzet e brezhoneg ivez, gortoz un tammig : amzer d'ar jubennerion achuiñ ar frazenn a-raok.

Kinnigoù predegennoù (300 ger d'ar muiañ ha levrinnadurezh verr) da gas da oliertidouaralre@gmail.com **e-raok ar 15/02/2015**.

Kemennet e vo diviz ar c'huzul-skiantel d'ar 5/03/2015, ur miz rik e-raok an devezh-studi, amzer d'ar bredegennerion da brientiñ o zra.

Razh an traoù a c'hello sikour get ar jubennerion a vo da gas d'ar **25/03/2015 d'an tardetañ** (ne vo ket skignet an dielloù resevet da zen erbet : sikour a raint prientiñ ar jubenniñ hepken).

Embann :

Mennet eo an aozerion d'embann aktoù an devezh-studi e-korf ar blezad da heul. Roet e vo d'ar re degemeret reolennoù da aesaat ar labour embann ha graet e vo àr-dro get ar c'homite skiantel.

Komite aozñ :

- Daniel Carré, ezel a guzul-meriñ Kerlenn Sten Kidna ha besprezidant Ti Douar Alre karget ag ar brezhoneg
- David ar Rouz, ezel a guzul-meriñ Kerlenn Sten Kidna
- Olivier Berson, animatour brezhonek Ti Douar Alre

Komite skiantel :

Daniel Carré, doktor àr ar brezhoneg ha besprezidant Ti Douar Alre
Daniel an Doujet, doktor àr ar brezhoneg, CRBC (Skol-veur Roazhon 2)
Erwan ar Pipeg, doktor àr ar brezhoneg, CRBC (Skol-veur Breizh ar C'hornôg)
David ar Rouz, doktor àr skiant an troiñ, PREFics (Skol-veur Kreisteiz Breizh)

Kalañder :

15/02/2015 : termen da gas ar c'hinnigoù
05/03/2015 : dibabet ar predegennoù get ar c'huzul skiantel
25/03/2015 : termen da gas ar skridoù ha razh an elfennoù a c'hello sikour get ar jubennerion
04/04/2015 : devezh-studi
05/10/2015 : termen da gas ar pennadoù-skrid
31/03/2016 : embannet an aktoù